

Lan-Wern (?)

Ar “Frankiz Nevez“ : Supplément à la “Croix des Côtes-du-Nord“ du dimanche 7 février 1897.

Modernaet eo bet an doare-skriva ;

Souezet e vo marteze meur a hini gand an adembannadur-ze. Greet eo bet evid rei da anavezoud petra a veze soñjet gand tud ‘zo e diwez an naontegved kantved.

I

Me ‘m-oa, pell ‘zo, laket em penn
....¹ el eur zonig diwar-benn,
Eun Itron “ar Frankiz nevez“.
Brud a zo ganti, ken a vez.

Dalhet e oan, du-mañ - du-ze,
Gand an dra-mañ, gand an dra-ze,
Ne dapen ket ma zroad er skeud,
Chom a ree ma fri war ar gleud !

Diskoulmet eo ma luziadenn
Ha savet eo ma rimadenn ;
Nan eo ket hir, bezet dineh,
Selaouet hi, mar plij ganeh !

II

Ar Frankiz a roas da’n den
Doue, e grouer, e berhenn,
A zo « gwir halloud d’ober vad,
Êzet, e peb leh, e pep stad,

Galloud da heuill, heb o dispenn,
Urz, lezenn kentel, gourhemenn,
A-ratoz-kaer, e peb doare,
Heb dalh ebed, e neb mare. »

Ar Frankiz-mañ ‘zo louedet !
He bizaj a zo mogedet,
N’hall ken chom pell, pell war he stal
‘N he flas e savo Frankiz all.

Homañ ‘deus meulerien e-leiz,
Hag a gaoze kras ha direiz,
Digoret ho tiskouarn, tudou !
Taolet evez diouz o ardou !

« An dud, emeze, beteg-henn,
‘Zo bet savet evel ezen ;
Kaset e vezent da vale
Gand gwrahaj² nay, hag heb dale.

¹: n’eus ket tu da lenn.

² gwrahaj : gwreg (?)

Bihan ha braz ‘rankent plega,
Heb ranna ger, hep tortiga³,
Neb a grede sevel e benn
Hennez a gouste d’e grohenn.

Poent ‘walh e oa krenna piz
Heh ivinou d’ar goz frankiz.
Nag a baour-kêz ‘zo bet mouget
Gand he chadenn villiget ! »

Bremañ zo⁴ deut, en on bete,
Eur wir frankiz “al Liberté“.
Homañ ‘deus krouet ar skiant
Ha dispaket an deskamant !

Er skeud da ze “Hi“ ‘vo mestrez,
Dre-oll, er bed, ha “Pennherez !“
N’eus ezomm ken a lezennou,
Skuiz e ver gand gourhemennou !

Ar gredenn goz ‘zo melg⁵ outi,
Tremen êzet ‘vo greet hepti ;
Habdale pell ‘vo paket mik
He zammig tan d’ar baourezig !

Giziuo nevez ‘zo war bep tra ;
N’ey ken ar paour da glask bara,
Al Liberté ‘bonvikaio
Fañch diarhen, Gwill an druillo’.

Kenavo d’ar hrampouez, d’a yod !
D’ar patatez, d’al lêz-ribot !⁶
Bremañ vo bemdez, da bep pred,
Kig ouz ar ber ha poñsined !

Friko da lein, friko da goan,
Keid a labour ha kuit a boan,
Arhant e-leiz ar godellou,
Gwin da freskad ar muzellou !

Gwechall ‘veze goulou-lutig,
Bremañ zo *lumière électrique*.
Mar dalh an treo⁷ da zond en-dro,
An heol ‘vo dilabour ‘n on bro.

³ tortiga : tortigella.

⁴ zo : tregerieg : ez eus.

⁵ melg : eur vi koukoug ?

⁶ Kenavo d’ar hrampouez, d’a yod !

D’ar patatez, d’al lêz-ribot ! : galleg

⁷ treo : tregerieg : traou.

Ar wella vamm eo “Mamm Frankiz”
Kenkoulz da Gouër ha da Vourhiz !
Biskoaz kemend-all a vadou,
Ne oe skuillet a-dornadou !

III

Diwanet zo sperejou braz,
Diwarne ‘savo brasoh c’hoaz.
Laket o-deus sklêr, ‘vel an de’,
N’eus Ivern, na Diaoul, na Doue !

Doue, Diaoul, Ivern ! marvailloù !
Tezennou koz ha spontailloù !
Da lakaad ar paour da blega
Hag ar pinvig da zispega.

An treo-ze ‘zo preñvedet
Mad da spouroni krennarded.
An dud a skiant ‘zo bremañ
Ne spontont ket gand kement-mañ.

Ar bed, a-bez, - kaerra labour !
A zo ‘n em hreet, hep kaoud sikour.
Eun dra sklêr eo ! N’hall den e nah,
Med e spered ne vez ket yah !

An dud ‘zo greet, er memez giz !
-Trugarez da vammig-frankiz-
Pa vo peurnezet o buhe’
N’o-devo mann da gaoud goude.

An amzer ‘dro hag a zistro :
Hirie ‘vo kaer, arhoaz, garo !
Gand Rouanez vraz “An natur”,
Emañ an dorn koulz hag ar stur.

Mar ne gredet d’eur sort kelenn,
Laket, mar plij, eur lunedenn
Hag e welfet an desteni⁸,
Dre-oll, er bed, o lugerni !

IV

D’an oll zo frankiz, tro-war-dro,
Kement da “Fanch” ha d’e “Aotrou”-
Dorn ouz dorn e kerzont o-daou.
Klevet gante, mar laran gaou !

Beb gwech, pa zegouez Votadeg,

⁸ an desteni : ? An tonkadur.

“Jakez lemm“ ha “Yann henaoueg“
A sko, keit-ha-keit, ken ponner
O “Billet“ e “Kev“ an aotrou Mêr !

Ha m’o-deus c’hoant da vond neuze
D’ober eun dro da gad du-ze,
Bete Pariz, ha da weled,
Pegen brao ‘vezer eno peillet,

En hentchou-houarn ‘zo plasou frank,
Ha kadoriou-reun, stank-ha-stank !
Gand paea reud, kuit a rabad,
‘Vez dor digor, degemer mad.

Savet e-barz, hag azezet !
Ha goude-ze ne spontet ket,
Eur hornedad, ‘n eur gaozeal,
Ha setu Kêr Bariz, raktal.

« Mar ‘pez kelou da gas d’ho tud,
Sellet amañ, kaerra burzud,
An telegraf a gerz en-dro
‘Vel an avel, a-dreuz d’ar vro !

Nag a dreo kaer ‘zo dre Bariz !
Krouet, a-bez, gand ar frankiz !
Eno ne goller ken amzer,
Na gand Ofis, na gand Pater.

N’eus ken nemed Klerikaled,
Tud a netra, pe koz gwrahed
A gement ‘stoufe d’an daoulin
Da baterad, noz ha mintin.

D’an Ilizou, da ouel, da Zul,
N’eer ket, bet soñj, med gand muzul,
Ne zere ket ouz Pariziz
Digluda da vond d’an Ofis.

Mar ‘heus c’hoant da gaoud plijadur
Ha rei d’ho spered e vezur,
Et d’an teatr, d’ar gomedî.
Eno ‘vad e kavfet dudi !

Beb noz ‘vz kanet a-zoare,
Ha dañset beteg ar beure,
N’eo nemed eur “Jilgodenn“
‘N hini ‘dro kein d’an abadenn !

Beet zoken Yannig Krennard

Hag a ra dineh e ganfard,
D'ar skol laik eh a bemde'
Hennez a gaozeo goude !

Mammig Frankiz, war mêz, en kêr,
D'he bugale 'zo mamm dener
Ha ne houl ket genaouerien
D'ober skol d'he zud, d'he mibien.

Ne vo pelloh ken, e neb roll,
Na *Frer* na *Sœur* o terhel skol,
Skol sœurezed ha skol frerien
'Zo mad d'ober *pampezeien*.

Argas aneze 'vo greet, d'ar red,
Evel brini diwar an ed !
Hag en o "*flas*" e vo laket
Tud a hiz nevez, laiked.

V

Setu, n'e' ket gwir, kelenn iskiz,
Ha komzou rannet diouz ar hiz !
Koulz e Bro-Hall hag en Arvor,
Koulz war douar ha koulz war vor !

Ma Broiz ker, mar ma hredet,
Ar homzou-ze na zelaoufet !
Rag gwasoh int d'ar halonou
'Vid avel-yud d'ar rozennou.

Diwar-bouez klask eur fals-frankiz
Na redet ket war-zu Pariz !
Chomet, chomet, e Breiz-Izel
Da ren ho puhez, da vervel.

Al Liberte 'zo treitourez,
Lipous, digabestr, rederez.
Ouz beg he zeod ne glever ekn,
Med gevier, falloni, sorhenn.

Ne vever ket, heb labourad,
Nag e bro 'n aod, nag e bro 'r hoad,
Neb na houl na poan nag aket
N'en-devo na madou na boued.

Labourom eta, kaloneg,
Er parkou glaz, hag el lanneg !
Ar gwella bara da zebri,
A vez gonezet o c'hwezi !

VI

Ni, Breiziz, a vez kenteliet,
Gand on mammou, war an oaled,
Diwar-benn Doue, tri ferson,
Gallouduz, peurbaduz, gwirion !

Krouer, pehenn da gement 'zo,
Divuzul e vadelezio',
Mar ne vefe ouz on harpa
Eh afem raktal da netra !

Roet 'n-eus dim, 'vid on diwall
'Eneb d'ar bed hag an dud fall,
Eur studierez, lemm, difazi,
Rag "Eñ" bemdez 'ra skol dezi.

An Iliz santel eo Honnez
Leun a skiant, leun a furnez.
Pa zenter vad ouz he helenn
Eh eer d'an Neñvou plên ha plên.

Peb den, dioustu pa vez maro,
E vez pouezet e obero' :
Oll ! mad ha foll, fur, dizoue,
E balañsou justis Doue.

Peurachuet ar bouezadenn,
Doue, kerkent, 'ro da viken
D'an ene mad, d'an torfetour
Paeamant, hervez e labour.

D'unan, en Neñv, meuli, kana,
D'eun all an tan, heb ehana,
'Leh ma kouez da vad, ar wezenn
E rank chom, er joa, pe 'n anken !

VII

'Vel eh oam-ni savet gwechall,
Savom aketuz ar re all.
Kasom heb aon, hag heb dale,
D'ar skol gristen, on bugale,

Pa vez digelenn eur bugel,
War an hent eeun ne chom ket pell.
'Vel eur vag heb he stur, e tro
Hag en em goll er poullou-tro.

Evid ma vint stard ha divrall
War an hent mad, ha didamall,
Deskom deze lezenn Jezuz :

Gand heuill anezi 'vezer evuruz !

Ha ni Breiziz, karom dalhmad
An Iliz santel, on mamm vad !
Karom, karom 'hed klouari,
Ar zent koz, ar Werhez Vari.

Mirom o Feiz divlamm ha gwerh,
Hag e vez harzet war on lerh.
Na veskem ket gand tud fallagr
Na hoapaom ket an treo zakr.

Karom, dreist-par, bete mervel
Dre-oll, bepred, on Breiz-Izel,
Karom on Yez, on hustumou,
On lanneier hag on brugou.

Gand ar maro pa vim skoet,
On horv er bez 'vo diskennet.
On ene, 'vad, a-denn-askell
'Nijo d'an Neñv, e Vreiz-Izel.

Lan-Wern